

ANVIOÙ HON LEC'HIOÙ (8)

plou, ploue, lann, tre(v) ha log. Prolegomenoù.

Gant an termenou-se e reer tro hon bro, ha dreist-holl tro struktur kozh hon bro. An termenou-se zo merkerioù anadurezh hon bro evel sistem klok, eus Naoned betek Brest. Termenoù all ac'h a da glokaat an daolenn, evel just. Termenoù a welfomp pelloc'h, evel *bod, kêr, minic'hi, releg*, etc. Lod termenou stag ouzh ur struktur dindan ar relijion, lod all ouzh ur struktur dindan ur struktur lik. Daoust da se int termenou o tegas goulennou koulz war o zalvoudegezh, koulz war o orin. Lod anezhe zo keltiek rik, diwar gwrizioù adkavet en yezhoù all Europa, lod all zo amprestoù latin, testoù eus un istor bet boutin, d'ur c'houlz a oa, gant ar Romaned, alouberien ma oant. Ha lod anezhe deuet war wel goude an istor boutin-se.

Bezit soñj, betek anvioù hon fredoù pemdeziek zo bet roet dimp gant ar Romaned, moarvat abalamour d'ar *roman way of life* : *merenn* eus *merenda*, *koan* eus *cēna*. *Lein*, eñ, hag a oa *leiff* en krennvrezhoneg, kar d'ar c'herneveureg *ly*, a vefe, hervez Anders Jørgensen, arbennigour barrek etimologiezh hon yezh krenn, kar d'an heniwerzhoneg *longud* “debriñ”. Ha marteze e oa bet diblaset hag addiblaset gant ar ger *merenn* diouzh kreiz an dez ! Ur pebeilañ anavezet mat, diouzh ar rannyezhoù pe an isrannyezhoù zoken.

Notennet e vo ne gaver tamm roud eus ur ger kembraeg kar d'ar ger *lein*. Un digarez da adkas da soñj ec'h eo dispartiet ar rannyezhoù predeneg entre daou rumm : ar c'hembraeg diouzh e du ha diouzh an tu all ar c'herneveureg hag ar brezhoneg o vont asambles. Predeneg an norzh-kornaoueg ha predeneg ar su-kornaoueg. A-gozh e oa ar c'herneveureg hag ar brezhoneg variezonoù eus ar memes rannyezh er predeneg. Ar pezh a zispleg meur a dra : geriennoù pe termenou boutin entreze ha na vezont ket kavet en kembraeg, met ivez ur sistem verb un disterañ disheñvel diouzh hini ar c'hembraeg. N'eo ket souezh eta ma vo kavet ar memes disparti war dachenn an anvioù-lec'hioù, priz disheñvel ar strukturoù.

Ha da vare an anglo-normaneg e vo kavet ar memes amprestoù er c'herneveureg hag er brezhoneg. Un emzalc'h yezhel kenstur. Skouerioù ? Sellit ouzh ar gerioù *achezon* “raison, motif”, *fest* “fixe, ferme” (cf. ar saozneg *fast*), pe all. D'ar c'houlz-se e veaje kalz danvez Breizh entre hon bro hag an enezenn, ha Kerneveur a oa al liamm ret ha breur da Vreizh.

Anat zo ur geriennoù mat hag a gaver en kerneveureg hag en brezhoneg, hag a zo dianav en kembraeg... Geriennoù ken boutin evel ar ger *kozh* (*coth* en kerneveureg, dianav en kembraeg, met anavezet en galianeg, cf. an anvioù *Cottus, Cotta, Cottius*), pe ken divoutin all evel *sinchat* “vite, promptement” (cf. ar c'herneveureg *synsy* “derc'hel” eus ar memes rumm, dianav en kembraeg ivez)...

Bezañ e rankan ouzhpenniñ ez eus ivez ul liamm geriaoueg a-gozh entre an iwerzhoneg hag ar brezhoneg, ul liamm ha na gaver ket gant ar c'herneveureg. Evel ma ouzomp re vat zo bet Iwerzhoniz o trevadenniñ lodennoù eus Kembre, ez eus ivez ul liamm geriaoueg entre ar c'hembraeg hag an iwerzhoneg. Met ul liamm disheñvel eo.

Eus pelec'h eta e teu al liammoù yezhel entre ar brezhoneg hag an iwerzhoneg ? N'eo ket sklaer-sklaer a vo lâret, nemet eo ret derc'hel soñj eo bet Breizh (an Arvorig da gentañ), a-viskoazh, ul lec'h tremen evit Iwerzhoniz, ha Breizh kozh un douar a zarempred tost. Sent kozh zo o deus anvioù gouezeleg, pe a orin gouezeleg splann (*Sane, Senan, Seni*, etc.). Traonienn al Liger ne oa ket pell ivez, ha gant se e oa Breizh un hent naturel evit tizhout Europa ar C'hornôg.

Ne gemerin nemet ur skouer : ar ger *gall* hag a oa e ster kentañ koulz en iwerzhoneg hag en brezhoneg “estrañjour dre ar yezh”, alese ar ger *galleg* “yezh an estrañjour, yezh an hini na gomz ket ar yezh”. Ur ger dianav en kerneveureg hag en kembraeg, nemet er geriadurioù ampresterien hardizh e vefe. Ur ger *gal(l)* all zo, ha hennezh zo boutin d'an holl yezhoù keltiek gant ar ster “feuls”. Kavet e vez da skouer en anv brezhoneg kozh *Gallmau*, en Lanrivoare, un anv hag a dalvez kement ha “le jeune (combattant?) fougueux, plein d'ardeur”.

Un dra all c'hoazh, diaesoc'h da zisplegañ, moarvat. Betek dibenn mare ar c'hrennvrezhoneg, en tro 1650 pe se, zo bet eus ur sistem enklotennoù bev mat, gant meur a zoare dibar, par d'an hollad

sistemoù bev en kembraeg. Al lennegezh vrezhoneg d'ar c'houlz-se a oa kar d'al lennegezh kerneveureg, evel pa vije eus an div lennegezh-se div lodenn eus ar memes hollad. Ul lennegezh pell diouzh hini ar c'hembraeg koulskoude... Met al lennegezh kerneveureg n'he deus ket legadet dimp ur sistem enklottennoù, evel en kembraeg hag en brezhoneg. Souezhus ha kevrinus. Un tamm labour evit an enklaskerien.

Enklottennoù bet o reiñ dimp ouzhpenn ur boelladenn : ur blijadur. Evel gwerzennoù an Ivoned eus c.1350 :

“An guen heguen am louenas
an hegarat an lagat glas
Mar ham guorant va karantit
da vout in nos oh e costit
uam garet, nep pret... etc.”

Penaos reiñ un “droidigezh” ? Penaos soñjal ec'h eo komprenet gant an holl ? Ne vern, ar skrid-se zo hon “ploue” kentañ dre m'eo an akt lennegel kentañ. Meskañ a ran ar mareoù ? Moarvat, met al lennegezh, an istor, ar strukturoù a dreuz an amzer, pe kantvedoù pe mizioù e vefent. Just un nebeud notennoù da vont en barzh ar skrid, muioc'h : *heguen* zo kontrol **dowen*, ar ger *doan* o vezañ anavezet mat gant Tregeriz, ar *uam* n'eo ket ar *vamm* met ar vaouez, *gwamm*, ar *wamm*.... Ur ger kozh.

Karantez zo, ha karantez da vezañ doujet ha c'hoariet.

Ma kemeromp ar werzenn gentañ e weler ar glotenn diabarzh en *wen*, en eil eo *at*, en trede eo *ant*, er pevare eo *os* hag en hini diwezhañ, diglok siwazh dimp, eo *et*. Ar c'hlotennoù diavaez zo *as* hag *it* (distaget /ith/ pe /idh/ rak *karantit* ha *costit* zo hendadoù *karantez* ha *kostez*).

Da beurglozañ gant an daolenn-se, e tegasan da soñj emañ hon zeir yezh predeneg bev, kembraeg, kerneveureg ha brezhoneg, en ul lod asambles gant ar pezh zo anvet galianeg : un hollad a reer “gallo-bredeneg” anezhañ. Da lâret eo teir yezh vev hag ur yezh varv. Zo welloc'h, pan deu ar predeneg war wel e varv ar galianeg. Na ankouaomp ket kennebeut ne oa ket unvan ar galianeg nag ar variezon a-dal da Enez Preden, en Arvorig ha pelloc'h war an aod, a oa en darempred gant ar predeneg, en un doare pemdeziek koulz lâret. Fedoù ha darvoudoù a oa bet studiet ha dielfennet pizh gant Leon Fleuriot, John T. Koch, Karl H. Schmidt, Peter Schrijver....

Na ankouaomp ket kennebeut all gwirvoud ar rannyezhoù : div vras dasparzhet entre norzh hag su Breizh. Un dra a-bouez : eus tu Gwened eo e kaver levezon brasañ predeneg an norzh-kornaoueg (lec'h m'emañ ar c'hembraeg herie), ul levezon pimantet gant ar staonekadur ken brudet (*tcheu-tcheu* a lârer dre fent) diwar elfennoù ar parlantoù roman a genveve eno d'ar c'houlz-se gant ar brezhoneg. Sed aze, gant Gwenediz zo miret ur sistem verb *bout* (lod all a lâr *bezañ*, en norzh, un adstumm en gwirionez), zo miret ur sistem fonologel dibar gant *th* kozh o vont da *h* pan a da *z* pe *s* en lec'h all. Ur fonologiezh dibar en gerioù evel *argouvroù* ma klever kentoc'h *argouroù* hag all en lec'h all, ur ger o klotañ gant ar c'hembraeg *argyfrau*... doujañs ha memor.

Herve Bihan

Levrlennadur

[roet e vo gant pennad diwezhañ ar rummad]